

KLOAREK KOAT AR RANNOU

HA

848 A h/

PENN-HEREZ KERZANTON.

War don : *Kurunen aour ha perlez ann Itron Varia Remengol*

Karantez ha glac'har !!!

I

Tud yaouank a Vreiz-Izel , didostait da glevet
Ar recit eus va daëlon ha va foaniou kalet :
Me so eur c'hloarek iaouank a eskopti Kemper
Am boa choazet eur vestrez enn eskopti Treguer.

E c'harz ar mor oun ganet e bro sant Gwenole ,
Ha biskoas nemet glac'har n'em euz bet em bue :
Glac'har ha guir garantez , setu va flaneden ,
Planeden rust ha kalet da heulia pen-da-ben.

Pa oan em bugaleach va mam baour aliez
A lavare din : « Va mab , kar ha ped ar Werc'hez ,
» Ped anez-hi , va mabik , ped Gwerc'hez Remengol ,
» Mar he fedez a galon , biken ne di da goll. »

Patronez va mam dener , Gwerc'hez vad Remengol ,
Pet gweach oc'h euz-hu miret na dounn me eat da goll !...
Ho pedet am euz bepret... breman arok mervel ,
E kaninn ho meuleudi d'am breudeur Breiz-Izel.

II

Pa gimiadiz dioc'h va zud , pa ziz pel eus ar ger ,
Evit mont war ar studi e skolach Landreguer ,
N'em boa nemet pemzek vloa , me a wele dourek ,
Rag evidon ne voa ken , allaz , a eurustet.

O tostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik ,
 Koant vel eun ælik Doue , he hano oa Metik ,
 D'ar gouent e zea ive , evel d'on d'ar studi ,
 He c'halonik oa mantret kement ha va hini.

« Salud deoc'h , plac'hik iouank , a lavariz dez-hi ,
 » Evel d'oun oc'h ankeniet o kuitat tud ho ti ;
 » Ho tornik flour em dornik lakit gant karantez ,
 » Hag e vezimp eurussoc'h o wela assamblez. »

Ar plac'hik a lavaraz : « O kloarek Gwenole ,
 » Pedomp Doue aliez ann eil 'vit eguile ;
 » Er joa koulz hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik ,
 » Euz a vremen da viquen e vo ho mestrezik. »

« O Metik , va c'harante , rozen gaër Breiz-Izel !
 » War ho mignon Gwenole tolit breman eur zell ,
 » Eur zell digant ho lagad a raï va eurstet
 « Keit a ma lezo Doue achanon war ar bed. »

Erru e kear Landreguer , erru e penn hon hent ,
 Me oe kaset d'ar skolach , ha Metik d'ar gouent ;
 Ann disparti oe kalet , c'hucro hag ankeniuz ;
 Ann eurstet , er bed man siouas ! n'eo ket padus !...

Tre ma chomiz er skolach , skeuden dous Metik kez
 Enn deiz , en noz dirazon a deve aliez ,
 Neuze e peden Doue ha Sænt koz Breiz Izel
 'Vit ma vije he bue laouen , eurus , santel.

III.

Pa oe achu va studi ez iz da Remengol
 Da bedi c'hoaz evit-hi Gwerc'hez vad *Remed-oll* ;
 Seiz tro a riz d'an aoter , devez ar pardon braz
 Ha seiz tro d'ann Iliz sakr war benn va daoulin noaz.

Goude ann oferen bred , ô pebeuz levenez !...
 Er vered gant he mamm ger , e velis Metik kez :
 Laouen oa evel ann deiz ha koant evel al loar ,
 Biskoaz pen-heréz ker koant n'euz bet war ann douar.

Luguerni a re he zall , he diou chod gwen ha ru ,
 He ginou , vel eur rosen , he bleo , he lagad du ,

A h/ Eur groaz aour en he c'herc'hen , he c'hoef dantelezet ,
Lavaret ' vije eun æl euz ann ên diskennet.

« O ! pebeus joa evidomp , va c'hloarek Gwenole ,
» En em gaout e Remengol , deiz pardon Mamm Doue ,
» Mamm ann oll dud ankeniet , Gwenole , ma mignon ,
» Evidout , e peb amzer , he fediz a galon .

» Metik koant , setu aman , setu ar voalen aour
» A roaz d'in , arog mervel , Annaïk , va mamm baour ,
» Doug anez-hi war da viz , kemer-hi digan-en ,
» Me dou war goalen va mamm d'az karet da viken .

» Ar groaz aour zo em c'herc'hen a vo did , Gwenole ,
» Eur guchen euz va bleo du a roan did ive ;
» War ar groaz se e touan ha dirag ar Werc'hez
» E vi karet gant Metik ' tre ma vo e buez . •

Ha daoulinet en Iliz , hon euz gred hor peden ,
Ha roet evit offrans , eur c'houriz koar melen ,
Binniget hor medalen , poket d'ar relegou ,
Da relegou sænt Breiz , karet gant hon tadou .

Goude hon eus baleet hon daou dre Vreiz-Izel ,
Ha guelet kals ' ilizou , kals a douriou huel ,
Abbati Landevennek ha mor Douarnenez ,
Lec'h ma oe beuzet kear Is hag ar brinces Ahez .

Gwelet hon deus Mene-Hom , hag ilis veur Kemper ,
Mene-Bre , ilis Bulat hag hini Landreguer ,
Kastel Brest , Sant Ian-ar-bis , ilis Salaün ar foll ,
Ha kaëra tour so er bed , tour huel Kastel-Pol .

Gwelet hon euz Ker-Ahez , Kemperle , Pont-n'Abat ,
Fouenan , bro ar merc'hed koant , Gwengamp hag Huelgoad
Montroulez ha Lann-Huon , Krozon ha Lez-n-even ,
Kallak , brò ar gourinou , Kastel-lin , Bosporden .

Klevet on euz o krozal ar mor e beg ar Raz ,
Biskoaz den n'hen tremenas eb santout aon pe c'hlaz ,
Bet omp en enez Sizun , en Heussa , Molenez ,
En enez Vaz , er leodet , ive er seiz enez .

Eur bloavez omp bet eurus evel daou ael Doue ,
 E pep'lec'h , pa hor guelec'h , ann holl a lavare :
 « Setu kloarek ar Rannou , soun evel eun derven ,
 » Setu Metik , he vestrez , fresk evel eur rozen. »

IV

Devez pardon sant Herbot , e kleviz eur e'helou
 En euz beuzet va c'halon , en eur mor a zaëlou ,
 Gant he zad ha gant he mamm d'am mestrezik Metik.
 Ez oa choazet da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan ze oa diot , hep furnez hep skiant ,
 Ne gare war ann douar nemet ar gwin-ardant ,
 Metik paour pa er gwele a grene gant enkreuz ,
 Hogen , he zud oa dallet , allas ! gant ann danvez !...

Mont a riz primm d'he gwelet neuze da Gerzanton ,
 Dre ma tostaen em c'hreiz , e krene va c'halon ,
 War dachen ar bourg o son e oa ar biniou ,
 Tud ann eured ha Metik beuzet en he daëlou.

Metik , a dreuz he daëlou , a reaz ouz-in eur sel
 En eur lavaret : « *Kouraj , Kouraj , mignon fidel !*
 Monet a ra en ilis , lavart'ra d'ar belek :
 « *Gwenole eo a garan , hag en vo va fried !...*

Koueza reaz d'ann douar , raktal ar benn-herrez ,
 Ha douget e oe dioc'h-tu euz ann ilis er mez ;
 Dispak he c'hoef , he dillat , ha dispak he bleo ;
 Seblantout a re beza eun aelik paour maro.

Mantret oïll gant ar glac'har e koueziz dann daoulin ,
 En eur grial : « O Metik , sell a druez ouzin !... »
 Pokat a riz d'he dornik , d'he diou chod , d'he c'herc'hen ;
 O Metik ! Metik ! Metik ! *Te p'hini a garien !...*

Ann disesper en dro din , evel eur vantel blom ,
 A gassaz pell a c'hanon , pell war zu Mene Hom...
 Va skiant a so kollet , va c'halon a so ien...
 O Metik ! Metik ! Metik ! *Te p'hini a garien !...*

Eiz de goude , asezet e kreiz koat ar Rannou ,
 War va diou chod e rede diou feunteun a zaëlou...

Pa glevis e Remengol o son ann anter-noz
E lavariz esklamet : « Va Doue , deoc'h bennos !

- « O Gwerc'hez sakr Remengol , sellit oc'h va glac'har ,
- » Aman oun deut da vervel brema war ho touar ,
- » Vare'hoaz pa zavo ann heol arc'hantet en envo
- » Dindan an derven goz ma , me vo kavet maro !!!...
- » O Metik , va dousik koant , te p'hini a garien ,
- » Kenavo 'lavarant did er bed ma da viken !
- » Gant ar maro unanet , ni c'hoaz en eum garo ,
- » Kenavo er baradoz , kenavo , kenavo !!!...

V

Ann de varlerc'h , da zao heol , eun durzunel hep par
A hirvoude en derven he c'hlemou a c'hlae'har ;
Ar c'hloarek a ioa maro , maro gant ann anken ,
En eur lavaret : « *Metik te p'hini a garien !*

Ar c'hloarek paour a starde , c'hoaz war he vuzellou ,
Kroas aour ha bleo du Metik , glebiet gant he zaëlou ;
War ann derven'n'doa skivet hano he garante ,
Ha diou galon unanet treuzet gant eur c'bleze.

Kasset eo bet ar c'hloarek da vered Remengol ,
Ha sebeliet e disheol ilis sakr Remed-oll ,
Iliz Patronez he vamm en deuz bet ken karet !...
Tud iaouank a Vreiz-Izel , pedit 'vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en he vele douar !!!...
Eur miz goude oe klevet huanadou glac'har...
Eur plac'hik gwisket e du , e bered Remengol
Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hez Remed-holl.

O tremen dre ar vered , velaz war eur men be
Skrivet neve flam hano he mignon Gwenole.
Epad ann noz daoulinet , Metik wele dourek ,
Ha d'ar men be e poked , e poked kalonek.

- « O Gwenole , eme-z-i , setu te o repos
- » E douar sakr Remengol ez out deut d'am gortaz ,

- » Mes kent ma tarzo ann de , o va muia karet ,
- » Er be man , dre zorn Doue , ni vezo unanet !!!...

Da zao-heol eur beleg koz , 'vont da bedi Doue
 He c'havaz anter-varo , gourveet war ar men-be ,
 Rei a raz d'ar plac'hik paour absolver ha pardon ,
 Metik a varvaz iaouen , raktal , gant rann-galon !...

Enn eur vogeden ezanz ene glân Metik kez ,
 'Vel eur goulmik , a nijaz d'ann ên gant ann elez ;
 Euz a varados Doue eur goabren arc'hantet ,
 War tour Iliz Remengol , neuze , zo diskennet.

War ar goabren ar Werc'hez ha sænt koz Breiz-Izel ,
 'Deuz kurunet Gwenole hag he vestrez santel ,
 Barzet ann amzer zo bet , drant , war ho zelennou
 Da Zoue , e brezonnek , a gane ho gwersiou.

Sebeliet e korf Metik , kichen korf Gwenole ,
 Ar maro 'n deuz unanet ann eil gant egile...
 Eur c'hloarek karantezuz 'n deuz war ho be skrivet
 Ar c'homzou truezuz man , gant he zaëlou mesket :

- « *Aman e repos , e peoc'h , kloarek koat ar Rannou*
- » *Den a feiz hag a galon , den a garie he vro ;*
- » *En e gichen eo kousket penn-heres Kersanton ,*
- « *Metik , ann ælik Doue , maro gant rann-galon !!!...* »

O gwerc'hez vad Remengol , setu ho taou vuguel
 Kousket e tal hoc'h Iliz ha dindan hoc'h askel ,
 'Vel eur Vamm garantezus war gavel he mabik ,
 C'hui dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!...

Kleier , ograou Remengol , truezuz c'hui zono ,
 Barzet ha pelerinet , daëlou c'hui a skuillo ,
 War be Metik , Gwenole , pa rafet ho peden ,
 Eur beden a garante ha karget a anken !....

Bevit e doujanz Doue , tud iaouank Breiz-Izel ,
 Pedit Gwerc'hez Remengol evit ma viot santel ;
 Sonjit ive e Metik , sonjit e Gwenole ,
 Bezit evel d'ho fidel ann eil d'eguile.

Koat ar Rannou, (Rann, Rannou, chants, séries), *bois des chants ou des séries*. Koat bras e dero, a zo e kichen, ha dar zao beol da iliz Remengol. Ann Drouizet, beleien ar Vretonnet, gwechal c'hoas difeiz, a droc'he, bep bloaz, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eul louzaouen, hanvet *huel-var*, p'hini a zao war ann dero.

Barz, barzet, (barde, poëte). Bep bloaz ive enem gave e koat ar Rannou hag e *Rumengoulou*, hirio hanvet Remengol, Barzet ann Arvor. Ar re ma a oa tud a skiant pere a gane gwersiou great gant ho, war ann traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meuleudi Teutatés. Doue faoz, p'hini a oa enoret el leac'h e ma brema iliz Remengol. D'aun hini vije hanvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun delen aour, war p'hini ar Barz a gane he soniou.

Gwenklan, Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent m'a teuz en-hi ar feiz kristen. — Brema zo c'hoaz e Breiz kalz Barzet, pere laka ho studi hag ho foan evit kenderc'hel en hon touez ar feiz ha iez bor bro. Er pen kenta eus ar barzet e ma ann aoutronez Kermarker, barz Breiz; ann abad Herri, barz ann Aviel; Troude; Kemar, person ha barz sant Laurans; ar Iann, barz koat ann Noz, Milin, barz Laouenan Breiz; Rannou, barz Roc'h Allaz; ar Skour, barz Itron Varia Remengol; F.-M. an Huel, barz Ker-ar-Born; Olier Souvetsr; barz Plouian; ann abad Poullaouek, kure Landevennek, barz sant Gwenole; Karis, person Plougras, barz Mene-Bre; Guernisson, barz Keravel, ha kalz a re all, pere e deuz gret eun niver bras a werziou ha soniou kaer.

- Kanit anez ho, Breiziz, rag beza int gwerziou
- Gret gant skiant ha kalon ha gant gwel vad komsou.
- Gret int e brezounek mad, nan e koz vrezounek,
- Evel ar re zo kalz re e brezounek-gallek. »

Barzet ha pelerinet, kanit gwerziou santel,
 Kanit gloar ha meuleudi da vamm tud Breiz-Izel,
 Ho Mamm hag ho Patrones. Rouanes ar bed oll,
 Mamm ann dud paour, ankeniet, *Gwerc'hez vad Remengol*.

I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz I.-V. Remengol.

PROPRIÉTÉ.

000153

ANN HINI A GARAN

War eun ton neve.

Ann hini a garan 'zo koant evel ann heol.
Karantezuz evel Gwerc'hez vad Remengol.

Doùe sent Breiz-Izel , Doue va zadou koz ,
D'ann hini a garan roit bepret ho pennoz.

Ann hini a garan 'zo dous evel al loar ,
En noz pa sklerijen bugale an douar.

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan 'zo vel ann alc'houeder
D'am e'halon paour e kan soniou , gwersiou tener ,

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan 'zo 'vel ann darzunet ,
Pa ve maro he far , enem doll da vervef.

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan 'zo eun telik Doue ,
Eun telik dous a ra joaustet va bue.

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan a zo dous he hano ,
Evel ar mel eo mad , koant evel ar bleunio.

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan em e'halon a chomo ,
'Tre ma vin e bue , ha goude va maro.

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan gane-me en disheol ,
A reposo eun de e bered Remengol.

Doùe sent Breiz-Izel , etc.

Ann hini a garan e palès ann Drindet ,
Gane-me da viken a vo karet , karet.

Doùe sent Breiz-Izel , Doue va zadou koz ,
D'ann hini a garan roit bepret ho pennoz.

I.-P.-M. AR SKOUR , Barz I.-V. Remengol.